

## Ar “Phising” gant Patrig Renaudineau

**Mignon : Salud Padrig !**

Padrig : Mont a ra mat ?

**M : Mat a-walc’h, met ur gudenn am eus.**

P : A ! Penaos ? Petra ‘c’hoarvez ?

**M : N’em eus ket arc’hant ebet ken war ma c’hont-vank.**

P : Met pell zo e oa Nedeleg ! Penaos ‘peus kollet arc’hant ?

**M : N’ouzon ket... Ne gomprenan ket.**

P : Sellet ‘peus ouzh da zave-en-noù bank ?

**M : Ya evel-just ! Kalz oberiadennoù zo abaoe ar sizhun dremenet.**

P : A ? Penaos eo posupl ?

**M : N’ouzon ket perak, n’em eus prenet netra gant ma c’hartenn-vank.**

P : Aaa ! Marteze ‘peus resevet posteloù faos en devezhioù diwezhañ.

**M : Ur postel faos ? Petra eo an dra-se ?**

P : Sur a-walc’h out bet pesketaet !

**M : Pesketaet !? N’ouzon ket ur pesk !**

P : Evel-just n’out ket ur pesk. Met war internet ez eus kalz pesketaerien.

**M : A ma ? Peseurt doare pesk a glask tapout an dud-se ?**

P : Tud evel-dout. Ne fell ket dezho kaout ul labour onest. Laeron int.

**M : Laeret on bet ? Ne gav ket din rak ma c’hartenn-vank zo em godell atav.**

P : Aha. Speredek eo al laeron-se. Aes eo laerez da niverenn gartenn-vank.

**M : Met penaos ?**

P : Resevet ‘peus ur postel gant an tailhoù ar sizhun dremenet ?

**M : A ya ! Un distaol a ginnigent din.**

P : Ha kliket ‘peus war al liamm ?

**M : Evel-just. Restaolet zo bet din 100€.**

P : Ha skrivet ‘peus da niverenn gartenn-vank war al lec’hienn ?

**M : Ma ya, ret e oa evit kaout an distaol.**

P : A ha ! Ul lec’hienn faos e oa ! Hag ur postel faos e oa ivez !

**M : Keet, n’eo ket posupl ! Banniel Bro-C’hall a oa er postel.**

P : Evel-just. Ne vez ket tapet ar pesked gant ar stouv ! Evel-se out bet laeret. Al laeron o deus kemeret da niverenn gant al lec’hienn faos-se. Ne oa ket lec’hienn an tailhoù. Ha neuze zo bet prenet kalz traoù gant da niverenn gartenn-vank. Ar pesketa eo pe *phishing* e saozneg.

**M : Chechuch ! Pegen drouk eo an dud ! Penaos e rin-me bremañ ??**

P : Aes eo. Da gentañ eo dav dit mont d’an ti-bank. Goude e vo ret dit goulenn ma vo nullet da gartenn-vank. Ha bremañ, diwall-mat pa vezez war internet. Na gred ket an holl draoù a vez skrivet er posteloù.

**M : Trugarez vras Padrig ! Mont a ran d’an ti-bank DIOUZH-TU !**